

KIS-851 – An trozhontiñ

(GE – 16 07 05)

En un notenn gent e ran anv eus an *trozhontiñ*¹. An termen a zespizan : diren d’an un rummenn ergorennoù a zo etrezo ur c’heñver a drehontusted.

Trehontus d’un domani lavaret eo pezh a zo er-maez anezhañ ha nad eo ket a un natur gantañ. Ar mennoz a ’m eus eus an aval zo enmanus da ’m bred, an aval e unan zo trehontus da ’m bred. Etre ar mennoz « aval », gwerc’henn vredel, hag an AVAL dirazon, gwerc’henn drael, ez eus ur c’heñver a drehontusted. Diouzhtu e teu er spered un trede termen, ar ger *aval* end-eeun, na vijed ket heptañ evit ober kel eus ar mennoz « aval » nag eus an AVAL e unan. Pe geñver zo etrezañ hag an daou dermen all ? Hag enmanus e ve d’ar bred ? En un doare, ya ; ha lavaret ne ’m eus ket “e teu er spered” ? Hag enmanus e ve d’an draelezh ? En un doare, ya c’hoazh ; ar ger a glevan pe a lennan zo trouz en aer pe huz war ar paper. Koulskoude ar ger n’emañ ket e-touez an traoù tre en doare m’emañ an AVAL ; an AVAL zo enmanus d’an draelezh, ar ger ivez met hepken e kement m’en deseller evel anadenn stanel pe luc’hel. Heñvel dra, ar ger n’emañ ket er bred tre en doare m’emañ ar mennoz « aval » ; ar mennoz « aval » zo enmanus d’ar bred, ar ger ivez met hepken e kement m’en deseller en e ster². Ur staelad hiron zo enta d’ar ger : ur c’heñver a drehontusted zo etrezañ hag ar bred, rak eztaolet eo bet eus ar bred ha kemeret en deus bout e-touez an traoù ; ur werc’henn drael eo enta, unan diforc’h avat ; e enmanusted d’an draelezh ne vir ket ouzh gwerc’hennoù trael all a gaout outañ ur c’heñver a drehontusted : an AVAL zo er-maez eus an domani m’emañ ar ger *aval*, eleze eus al lavar, ha ned eo ket a un natur gantañ. Evel un Adam argaset diouzh an Eden, e venn ar ger bezañ un dra evel ar re all, nemet an traoù all ne ziwelont ket e orin diavaezour hag outañ e reont gwech evel ouzh

¹ Sl. KIS-848, p. 137, n. 22.

² A-gostez e lezan kement ha ma c’hallan an hanc’heriegoù saosurek ha huserlek, war-benn hepkoriñ ergorelouriezh ar yezhoniourion hag emouzelouriezh an anadenniourion.

un heilot, gwech evel ouzh un neñvel. Ur staelad heilot, ur roll mavek, en deus ar ger *aval* pa vezan o prenañ frouezh. Ur roll neñvel, ur staelad trabedel, en deus an *aval* er C’heneliezh. En daou zegouezh, e vez doujet d’ar c’heñver a drehontusted a zo etre an *aval* hag an *AVAL* : ar marc’hadour frouezh, ur wech klevet va goulenn, a dro ouzh an dra, a lez ar ger a-gostez, a drehont ar ger evel eztaol eus va goulenn, evit plediñ gant an dra ; diouzh o zu, aozerion an Torah a gemeras harp war ur ger eus ar bed boutin evit bukañ d’ur par trehontus da hemañ. Heñvel dra, pa leterc’h ar barzh bronnoù ar vaouez evel avaloù, e stign ur c’heñver a drehontusted etre ar bed boutin hag an hanved ma ’z eus avaloù eus ar bronnoù. Ar skizofren avat o trezerc’hañ ar vronn evel un aval hag o plantañ e zent enni a ziskouezfe dre eno e tianavez ar c’heñver a drehontusted a zo etre ar gerioù hag an traoù. Hevelep trozañ a ’r c’heñver a drehontusted eo a ran *trozhontiñ* anezhañ.

E KIS-848 n. 22 e venegan daveoù da skouerioù all a drozhontiñ : evit a sell an arhentoù, ar merzhout, lavar ar bredelfennerezh, an nervskiant...

An arhent zo an douger stlenn elfennel er stlennijinennoù. En ur mod ez eo an den ur stlennijinenn ivez, en ur mod hepken. Mar galler deveizañ un darn vras eus ar c’hennevid, eus arc’hwelerezh ar reizhiadoù nerval, hormonel, h.a. dre wered an arhentoù o trehentiñ dre e gorf, ez eus un darn all eus doareoù an den na c’haller ket ober seiz warni dre ar stlenneg. N’eo ket peogwir ne ve ket ar stlenneg araokaet a-walc’h, met peogwir, en tu all d’e sujidigezh d’an arhentoù, e ra mab den gant an arouezioù — ha pa ’z eo diforc’h an arouez diouzh an arhent, n’eo ket dre ur *mui*, met dre ul *lei*. Lodek eo an arhent en un argerzh ; ur roll heñcher eo e hini : beziadoù war gerzh a laka eñ war hentoù raktreset ; un devoud alvezel eo, kempleg didro diouzh ar savelegezh. An arouez ne dorr ket ar savelegezh kennebeut, ar savelegezh koulskoude ne spir ket d’ober seiz warni ; lodek eo an arouez e dizankted³ mab den ; amplegañ a ra an emdennañ. An den a ro deroù d’ar bed⁴ dre emdennañ ha lezel an traoù da vout dirazañ, da zremmañ outañ, da gaout

³ Sl. La-11 216 hh. Sl. ivez amañ pelloc’h, pp. 167-168.

⁴ A-zivout keal ar *bed*, sl. La-11 228. Ar *bed* zo bed ar skiant voutin evel m’en buhezomp war ar pemdez, a-gevenep d’an *alvez*, keal goubarel bet distrilhet dre vukañ d’ar werc’helezh fizikel, eleze savelek ha jedoniekadus. “*Ar bed hep an den n’eo ket ar bed c’hoazh : ar bed ne c’hortoz ket an den evit bezañ gwerc’hel, e c’hortoz a ra evit degemer e ster a ved*” (M. DUFRENNE). A-zivout ar *c’hediñ* evel amparañ hevelept an traoù, sl. ivez La-10 397 hh., La-11 215 hh.

dremm : ar *merzhout* eo an dremm-ouzh-dremm-se etre mab den hag an traoù — an den avat a ra ar c'hammed kentañ, war e giz. Er goullou graet gant an emdennañ eo e nod an arouez⁵. E rezh an *trec'houllo* a zo en he ster e toug an arouez merk he lec'h genidik. Amañ ez anad al *lei* a ardaolen diaraok ouzh an arouez. Perzh enien, retvezek, an arhent eo an anargemm, ar fest ez eo, tra ma 'z eo dezverkoù an arouez an trec'houllo, an anfested (un arouez hep trec'houllo ken, o vont fest, a ve un arhent !) Etre an arhent, lodek frank en traoù alvezel, enta hag an arouez, hiron valigant, frouezh hontren mab den e-maez an hentoù savelek, emañ ar c'heñver a drehontusted hon eus bet tro da zitouriñ etre an AVAL hag an *aval*. Trozhontiñ emañ zo arvennout un araokaat a lakafe urzh ha stabilded da ren war domani al luz hag ar strafuilh ez eo hini an arouezioù ; zo diawelout gouennoù nevez a arhentoù o defe perzhioù krouus an arouezioù hep bezañ evelto meni spesoù hep krap eeun war an traoù. Un alberz hon eus bet eus ar furm-se a drozhontiñ gant raktres un *novlangue française*⁶, anezhi ul lavar diazezet war areg ar stlennijinennoù, c'hwennet dioutañ pep trec'houllo — dilezet gantañ lieskemeradezh ar gerioù, mozioù hag amzerioù ar verboù, h.a. —, e berr un idiom arveradus ingal gant an dud hag an ijinenoù. Gortoz digant lanv an araokaat kalvezel ma tigas tropell dianket an arouezioù da veurvor an alvez zo dianaout ez eo den an den n'eo ket hepken dre al lanviñ, met da gentañ dre an treañ, ket dre an araokaat hepken, met dre an argizañ, ket dre ar *broueriñ*, met dre ar *gadiñ*⁷ da gentañ holl. En Notenn c'hramadegel XV e staden emañ “al lavarout [...] a-c'haoliad war broueriñ ha gadiñ⁸”. Ne oufen nemet menegiñ ivez pezh a skriven en Notenn c'hramadegel XIV : “a drugarez d'al lavar e tibrad an den diouzh an anamzer hag e tro ouzh dremmwelioù ar bremañ, an tremened, an dazont, an dec'hmeg, e berr : ez eskor an den evel andon ar bed⁹”. Anat eo ez eus anv emañ eus al lavar kevan, an hini bresk, diasur, a zo en e greiz gloaz an trec'houllo genidik, ha n'eo ket eus an areg, ar relegenn anezhañ. Kempoell eo an drozhonterion gempred : rak emzizober eus trehontusted al lavar zo

⁵ Hiroc'h a lennor war an emdennañ evel amplegad ar merzhout hag al lavarout e La-16 289 hh.

⁶ Sl. KIS-848, La-17 130-146.

⁷ Sl. La-16 290-295

⁸ Sl. La-16 292.

⁹ Sl. La-16 244. Kv. J.-P. SARTRE : “An den zo ar beziad a ra, pa nod, ez eus ur bed” (*Situations*, I, 234).

unster gant lakaat un termen d'an istor — mannelaat ar bed dre e zeren da anamzer an alvez. FREUD, a gafunas buan e erbar kentañ a oa, evel a ouzer, ober eus ar Vredoniezh ur skiant alvezel, n'en dije ket manket a welout eno gwered al luzadoù a varv, “meurdezus en o andesaveladur¹⁰”.

An trozhontiñ emaoomp o paouez deskrivañ eo an hini a sell evel gallus stlennekaat holl arc'hwelioù ar realezh denel ha diorren an hevelep arc'hwelioù en ijinenoù, amkan hemañ a ampleg treuzfurmiñ an arouezioù, dilemel diouto an trec'houllo o laka en arlez, pourchas dezho stabilded dre dreiñ o ster e stlenn ha, dre zigeriñ dezho dor an ijinenoù, grataat dezho ur gwerc'h eeun war an traoù. Neoazh, evit damkanerion 'zo n'eo ket a-walc'h dianaout ar c'heñver a drehontusted etre lavar an dud ha “lavar” an ijinenoù. Dre un trozhontiñ all e vennont diverkañ ar c'hemm natur etre beved hag alvez, diren ar realezh loenel (hag ar realoù boutin etre den ha loen) d'un arc'hwelerezh ijinenoù.

Ha kemm zo etre ul loen hag ur robot ? Amañ ned aimp ket gant an hent hon eus kemeret evit diforc'hekaat realezh lavarel an den, a oa kevenebiñ an arouez hag an arhent, rak, ha pa broufed ne spir ket an arhentoù da zisplegañ holl vonedoù al loened, ne c'haller ket diskouez e vez al loened o c'heneal hag oc'h arverañ arouezioù. Heñvel dra, mar troer ouzh ar merzhout, ned eur ket evit hevelebiñ an dec'havaelañ denel ha loenel.

Hans JONAS a dennas an evezh war un devoud diac'hinek : ur bev — er skouer dibabet : un amoebenn — a vir e hevelepted endra gemm dizehan an elfenoù alvezel en ampar ; an danvez anezhañ ne c'hoarvez ket eus un teskad molekul piaouel dezhañ, met eus ul lanvad molekul lerc'h ouzh lerc'h estren dezhañ, parzhiat ennañ, estren dezhañ adarre¹¹. A se e tispantias daou seurt hevelepted : hevelepted ar beziadoù alvezel (a ginnigan envel *treanded*¹²), hevelepted ar beziadoù bevedel (a ran *treüded* anezhi¹³).

Devoud all lakaet war wel gant Hans JONAS : ar bev zo an danvez alvezel en ampar, emañ “*en arun klok e pep mare gant e zafar kempred*¹⁴” ha

¹⁰ Sl. GBLF §§ 1024, 1031.

¹¹ Sl. La-11 215

¹² Sl. La-11 213 hh.

¹³ Sl. La-10 266 hh., La-11 213 hh.

¹⁴ Hans JONAS, *Philosophical Essays — From Ancient Creed to Technological Man*, New Jersey, 1974, p. 191 ; sl. La-11 236, tr. br. 216.

koulskoude n'eo ket hevelep outañ ; dezverk ar bev eo bezañ “*un hennad solwezel a zo dezhañ ur meni freedom e-keñver e solwez, un dizalc'h e-keñver an danvez end-eeun a ya koulskoude d'e ober en e bezh*”¹⁵. Ha ne adkaver ket ul luniad leteñvel ouzh hini an arouez ? Leteñvel eo ar c'heñver a drehontusted etre ar werc'henn vredel hag ar werc'henn drael a ya kevret d'ober an arouez ouzh an hini a zo etre ar werc'henn vevedel hag ar werc'henn alvezel a ya kevret¹⁶ d'ober ar bev. Hevelep keñver diac'hinek zo a seurt natur ma piaou ar bev drezañ, eme Hans JONAS, “*a sort of freedom*” — termen a 'm eus troet dre Br. *dizank(ted)*. Ha JONAS ha dispakañ naouusterioù an dizankted. Eviti da vezañ dezverk ar beved, n'eus ket anezhi ur glad evel ma 'z eo da skouer an tolz evit an danvez alvezel. Da bep bev ez eus un deroù hag un diwezh, etre an daou un hoali : gant ar beved ez eskor an amzerelezh (an “amzerelezh” alvezel zo unan *kedet*, rak, ent strizh, ez eo anamzerel an alvez). Evel pep *freedom*, e c'houl an dizankted ma stourmfed d'he gounit : an dizankted zo da gentañ un *dizankañ*, “*an emdenn (self-isolation) a ra ar beved diouzh ar pep all eus an draelezh. Anunded (selfhood) ar bevedeg a c'hoarvez eus e gevanded hag e ziungenezh don e diabarzh, hag e dargemm ouzh, un hollvetoù ma revez un etrewerediñ ungenezh ; eus e dreüiniñ a zo emaddervaat pred goude pred, emgefleuniañ ha daeañ nerzhoù kompezus an treaniñ (sameness) alvezel tro-dro, e gwir emsevel ouzh ar pep all eus an traoù*”¹⁷.” Evel ma skriv ivez Hans JONAS, emañ goustennet hoali a-bezh ar bev gant “*an damant izek [a] zo damant da vezout, eleze da zerc'hel da vezout — pezh a rae SPINOZA anezhañ ar vruer (conatus) da badout er bezout*”¹⁸.

¹⁵ *Id., ibid.*

¹⁶ Da verkañ ar c'heñver etre an div werc'helezh, bevedel hag alvezel, eus ar bev e ra Hans JONAS gant an araogenn *in conjunction with* (*id.*, p. 190, sl. La-11 235) — a 'm eus troet dre Br. *a-gesout gant* (sl. La-11 216, 231). Mont a rafen dre an hevelep araogenn da verkañ ar c'heñver etre an div werc'helezh, bredel ha trael, eus an arouez ; e se, e trofen erganad ar yezhoniourion : Gl. “le signifié *est lié à* un signifiant” dre Br. “*emañ an arganteul a-gesout gant ur c'hanteul*”, pe : “*kesoutet emañ an arganteul gant ar c'hanteul*”, pe c'hoazh : “*kesoutet emañ kanteul hag arganteul*” (sl. La-08 342-343).

¹⁷ *Id.*, p. 196 ; sl. La-11 240, tr. br. 223.

¹⁸ *Id.*, p. 197 ; sl. La-11 241, tr. br. 225.

Bezout a ra¹⁹ ar bev enta hervez div gemez : ar gemez alvezel, hini al lanvad molekul o tremen dre ar bevedeg diwar-bouez ar c’hennevid (e ster ar vevoniezh klasel) ; kemez vevedel an hinienn (hervez an diskiblezh a ra Hans JONAS anezhi ar Vevoniezh prederel²⁰), dezhi dizankted hag amzerelezh, anunded a-gevenep d’un allded, “*o wiskañ war gement a zo en tu all da harzoù ar bevedeg un dremm estren hag, en ur mod enebus : dremm ur « bed » ma rank ar bevedeg derc’hel ennañ, drezañ hag outañ*²¹.” Evit dec’heriañ keal ar « *bed* » evel m’en intent amañ Hans JONAS, notomp e ra prederourion all gant *Umwelt*²², *amved*.

Evit kendastum, *amved* ar bev a gemer gant mab den rezh ar *bed*. Mard eo boutin etre plant, loen ha den naouusterioù ar bev, e tiouelier gant ar plant hag al loen an diouzerc’h hag an egin eus naouusterioù an den. Bezañs enien an un *keñver a drehontusted*, o terc’haviñ amved ha bed, a zibrad plant, loen ha den diouzh an alvez. An un *emdennañ* kevaraezus da vezout ar plant, al loen hag an den, a gevaraez an den da verzhout ha da lavarout. An un *dizankted* a ro da blant, loen ha den an dro da wereañ neuizioù piaouel, andispak enno gouez hag erouez, gwerc’h ha derc’h, a laka bezus gant an den dispakañ e ouez en arouezioù hag e werc’h en erzerc’hoù.

Hentenn imbourc’h kantreizh eo *hevelebeka* an arc’hwelioù nerval ha stlennegel. Trozhontañ eo avat *hevelebiñ* bevedeg hag ijinenn. An ijinennoù, erzerc’hoù eus gwerc’h an den, disoc’h ur broueriñ o nodiñ er goull dec’hanet gant an emdennañ, n’eus ganto na dizankted, na keñver enien a drehontusted. Parzhiat int en alvez hep mui : ha pa vent an hefilañ robotoù, ez eo o hiniennded bepred un *hiniennded kedet*, tra ma ’z eo hiniennded ar bevion un *hiniennded andoniek* bepred²³.

¹⁹ A-zivout *bout* verb gwezhiañ, sl. La-13 39 n. 2.

²⁰ Sl. La-11 210. A-zivout ar c’hennevid e preder Hans JONAS, sl. La-11 222.

²¹ *Id.*, p. 196 ; sl. La-11 240, tr. br. 223.

²² Termen krouet gant Jakob von UEXKÜLL a ziazezas e 1925 an *Institut für Umweltforschung*, sl. La-11 330.

²³ Sl. ar mellad Br. **arun**, La-11 227-228 ; p. 228, lenn “*ur c’heñver a drehontusted*” e-lec’h “*ur c’heñver a drehontelezh*”. A-zivout hiniennded (pe treüded) kedet *kengounaouet* an traoù naturel ha *kengouzerc’het* an traoù oberiet, sl. La-10 397 hh.